

MERVEL DA VÉVA !

KANAOUENNOU HA BARZONEGOU

BOKEDOU

Lann , Brug ha Balan
euz a vro Leon .

Gand "Klao da"

Le Frat Claude Marie .

Enneben 1.

MERVEL DA Veva !

MEULEUDI ^I BRO-LEON. (SON).

Allegretto

Me mbeuz c'hoanteet hirio se-vel eur zon nevez ,
Eur zon a vo ka-net en drao-nien, er me-néz ,
En enor da vro Leon , a zo dre-oll brudet
Evel ar gwella bro er penn-ma deuz ar bed .

¹
Me mbeuz c'hoanteet hirio sevel eur zon nevez ,
Eur zon a vo kanet en draonien, er menez ,
En enor da vro Leon , a zo dre-oll brudet
Evel ar gwella bro er penn-ma deuz ar bed .

²
Pa oa c'hoaz paianed hon tadou-koz e Leon
Doue 'n deuz war hor bro great eur zell a galon ;
He gaoulagad kel lemm a zibab ebestet
Hag a gaso da breiz da brezeg an Avel

³
Leon a zo bet atav e kalon hor C'hrouer
Dilennet ha miret gant karantez dener ;
Abredik e velomp en deuz d'ezhi kaset
He vignoned santel, e bro Gueumry brudet .

⁴
E Breiz Gromor, du-ze, Tol oa en he beden
Pa vel tostik d'ezan eun eal gwisket e gwenn ;
Euz an enw e tired, digaset gant Jezuz,
Ganther ar c'helou-ma, a dra-zur souezuz :

Pol, servicher fidel, savit ac' halese,
Setu mennoz hor Mestr, bolontez hon Doue;
Treuizit, treuizit ar mor, hag it prim da Brezek
Da Vreiz. Izel, du. ge. a zo gwall ezommek.

6
E ma rak-tal en hent gant eun nebeud menec'h,
Mont a ra war ar mor, trezek Arvor, dinec'h;
Dreiz e ve laret ar vad a reaz dre oll
D'an dud keiz paianed o ren eur vuez diroll.

7
Ar peiz en deuz greut Pol tro war dro da Gastel
Degerment a re all ho deuz e Breiz. Izel
Diskaret giziou kruz, ha plantet en o lec'h
Krouz santel hor Zalver ha kustummoù dibec'h.

8
D'ieu n'hen deuz ket lennet buez Mikel Nobletz,
A zo bet o prezek e Leon e pel parrez?
anavout a rer ive istor an tad Maner,
Manach santel mearbed hag eur gwir visioner.

9
Evel en amzer goz Breiz. Izel zo atao
Stag ouz he madoù sakr; da viken e chommo.
O va bro-gaer a Leon sorjal ennoud me gar,
Be zo va c'harantez dreist oll draou an douar.

10
Leoniz a ia bep bloaz gant feiz d'ar pardonioù,
Eiz ma z'ea gwech all arack hint ho zadou;
Ar c'hredennoù santel euz eur rumm d'egile
Koulz hag eun digouez sakr a dremen e leve.

11
An oll e bro Leon a gar rei digemer
D'ar leorien truilhennek ha d'ar c'heaz beacher;
Da zibri, da eva, diouz ho c'hoant e karint,
Ha plouz fresk da gousket kement ha ma karint.

12
Leoniz a zo bepred douget d'o brezonek
Vel ma chomm ar brennik en aod ouz ar c'herrek;
Harout a reont ivez o bro, o farkerier,
Evel goerwi a reont pell diouz o bannier.

13
Vel ma ma e Kerne iliz koant Rumengol,
E bro Leon e kaver, war bez Saluin ar Foll,
Eun iliz kaeroc'h c'hoaz, d'ar Werc'hez benniget
Gant hon tadou devot dudiuz kizellet.

14
Ha bet oc'h er Tolvaat reiz karr ar pardon braz?
Muioc'h a dud a feiz gwelet oc'h euz biskoaz,

Diredet a bep leac'h betek an iliz goz ,
Da zaludi Mari , mamm dous ar baradoz .

15

Pa zellar en dro d'in , me gav e Leon ar groaz ,
War lein an torgennoù ha war an henchou braz ,
Eun taolik an amzer euz a greiz e labour
An den a zell outhi evit goulenn sikour .

16

Evel kador sant Per , bro Leon zo war ar roc'h ,
N'oufe bepa harpet war diazeq gwelloc'h ,
Ar mor dirgl a sko , a sko fell amzer zo ,
Heb he diskara tamm ; biken n'he diskaro ...

17

Goazed , merc'heù bro Leon ho deuz eur penn kalet ,
Evel ar vro meinek e pini zint ganet ...
Daoust da nerc' an ifern , an dud fallak biken
Na vougint en hor c'heiz sklerder ar gwir greden .

18

Yez enoruz hor Breiz , yez koz ar Victoried ,
Ar Brezonek dinoaz a zo hirio barnet ,
Ha barnet d'ar maro gant tud kriz diavulek ,
Ho deuz c'hoant ober d'comp komz hepken ar gallek .

19

Hogen , dre be seurt gwir , ama , e teuont hi ,
Da walgas , da waska hor yez benniget . ni ?
Keit ha ma vo e Leon eul Leonard en he gav
Ar Brezonek a vo bepred ar renk kenta .

20

Haq oll brema , Leoniz , karit a vouez huel ,
" Bevet ar Brezonek ! Bevet yez Breiz ! He !"
" Mil malloz d'an dud fall , d'an dud diskiantet ,
" A ra , hep gwir ebed , brezel d'ar Victoried ! ... "

~~~~~

II.

CHOMMIT EN O KLUD !

(Son) .

War don : Ar Benherez a Geroulas .

Bretoned, chommit en o klud !  
Labourit parkeier o tud !  
Er measion 'z euz fupvidigez ,  
Hag er c'hearioù kalz dienez .

Tud yaouank, chommit en o klud !  
Er c'hearioù ez euz avel iud ,  
Hag a c'houez krenn e peb amzer  
War gorf kizidiek ar skuber ...

Pactured, chommit en o klud !  
Chommit e kichenik o tud ;  
On danvad dous pell diouz he mamm  
Ma zalec ket da yaout lamm .

Devezourien, chommit en o klud !  
Davust ma kavit o pae mumed ;  
Ar reder bro na gav aliez  
Hemed dismegans, paourentez .

Kenvroiz, chommit en o klud !  
Chommit e karterioù o tud !  
Er measion c'houi gavo yec'hed,  
Deoc'h gwirion, frankiz, eüruzded .

Evidoun me jommo em glud  
Dizanavezet gand an dud ;  
Ar vezen a gav re huel  
A vez diskaret en avel .

# KROAZIK VA GWESTLOU.

E harz an aoteriou, en deiz-se daoulinet,  
Da Grouer ar bed-oll me am beuz lavaret :  
« D'eoc'h-hu, ô va Aotrou, me a' re va c'halon,  
« A vrema da viken, renit renit war n'hon.

« Paourentez ha Gwerched, ivez Sentidigez,  
« C'houi vo va friejou penn-da-benn va buez;  
« Ne fell d'in er bed-ma nemed hoc'h, va Jezuz,  
« Dasprener an eneoù, va Mostr madeleuz.

« Dilez a ran a-grenn plijadur vean ar bed;  
« Madou hag enorioù n'ho klaskin mui n'epred;  
« Beteg heur ar maro me vo d'eoc'h, va Doue,  
« O tougen d'ho karet eneoù ar vugale ...»

Roet ez euz d'in neuze eur groazik koeur melen,  
Gand eur gordonen zu vit gellout he dougen.  
O Kroaz, va oll zenzor, na c'houi zo karadek!  
Pegement e plij d'in rei d'eoc'h-hu pokou c'hoek!

Me garo, em c'herc'hen, ho tougen noz ha deiz,  
Hag eur vech an amzer sellet ouzoc'h gand feiz.  
Vit gouzanv va foanion a gorf hag a spered,  
Eur zell hebbken war n'hoc'h am zikouro bepred.

Dont a rai ar c'hlenved d'am staga n'eur gwele,  
Kroazik ker va Gwestlou am frealzo neuze.  
D'am Zalver ouz ar Groaz vo va zell diveza,  
Pa larin kena da sklerder ar bed-ma ...

Etre va daouarn ien, pa vezin tremenet,  
Va C'hroazik vo lakeat ouspenn va japeled;  
Va mignounez feal da viken am heulio,  
D'ar vered, en arched, va C'hroaz ganen ielo.

Mignounez venmiget, va c'hennerzit bepred  
Eneb ar bed, ar c'hig, eneb an drouk spered,  
M'ac'h hellin, va Jezuz, ô c'houi va c'harantez,  
Ho meuli, d'am maro, en o rouantelez! ...

## BLEUNIOU MAE. ~.

(Fleurs de Mai).

Jopik Kervenn a zo gwall glanv  
Abaoue ma 'z eo deuet ar goano ;  
He vammik paour, en he gichen  
A zo bec'hiet gand an anken .

Hogen, an teodjou ia en dro  
Da c'hedal ma teui ar maro ;  
A bep seurt traoù zo bet gwelet  
Abaoue m'eo Jopik klanvet .

— « M'em beuz klevet e doug an noz ,  
« Labous-skrijer tost d'an ti koz ,  
« O teuler he skrijadennoù :  
« Jopik a varro en deizioù ... ! »

— « Klevet em beuz o vigourra  
Karrik an Ankoù dre ama ,  
Heuilhet gand kalz a dud varo ,  
A iea vit sur da Gerharo ... »

Ar vammik keaz a zo plegjet  
War he bugelik alteret ;  
— « Mab, an nevez amzer hirio !  
Abarz nemeur te bareo ... »

— « Mammik, Elez ar Baradoz ! ...  
Sklerijen gaer ... Mui ken a noz ...  
O mamm, va fenn ! ... na me m'beuz joan ! ...  
Al linser wenn ... An arched moan ! ... »

— « Lak' ta da benn, va mab Jopik ,  
War va c'halon eur pennadik ...  
Kalon eur vamm eo'r penn-wele  
Ar gwella vit he bugale . »

Daou viz varlerc'h<sup>\*\*\*</sup> na darze m' de ,  
Ar paotrik iaouank a varwe ;  
Ar beleg a laraz gand feiz  
Evithan eun de profundis .

Enneben 7.

D'ar meurs vintin pa zave'n eol  
Al labouset a ioa mud oll ;  
Boked ebed ouz ar c'hleuziou  
E neb leac'h war bord an henchou .

Ma klever en ekleo , a bell ,  
Pedennou an Iliz santel ,  
O kas d'ar vered' an arched  
Gand pevar den yaouank douget .

Skourrou ar gwez pa dremene  
Uz d'al linser wenn a blege ,  
Evit diskouez ivez o c'hanv  
D'an neb a varv e boulec'h an anv .

Ar person koz a bede c'hoaz  
Pa ehanet da zon ar glaz ;  
Eur beradik dour benniget ,  
Ha kenavo d'an douaret ! ....

Mil gwech eüruz<sup>\*</sup> ar Vretoned  
A varv en ho broik karet !  
O ! nan , ne d'int ket oll maro ,  
Pa 'z int douaret en o bro !...

Bep sul goude an oferen ,  
Ar gerent a lar eur beden  
War beziou glaz an Anaon kez ,  
A vez sonj anezo bemdez ....

# POAN RAFEZ D'ACH EALIK !

Bugelik koant ha mibin ,  
 A gavan o c'hoarzin ,  
 Ma tigouez ganez gwelet  
 Eur c'houlik alaouret  
 O c'hournijal er prajou ,  
 O klask ar bokedou ,  
 Na dorr ket he askellik ,  
 Poan rafez d'ac'h ealik !

Var gerrek flour an aodchou ,  
 O tiskuij avechou ,  
 Ma tigouez ganez gwelet  
 Er c'hlaizard perlezet ,  
 O tommad en eol skeduz  
 He gorfik lugernuz ,  
 Na vuzeun ket al boerik ,  
 Poan rafez d'ac'h ealik !

Pe deus an nevez amzer  
 Gand he geision seder ,  
 Ma tigouez ganez gwelet  
 Pe vion , pe labouset ,  
 Kuzet en eur c'harg lannek  
 Pe barz eur valanek ,  
 Na gistruij ket an neizik ,  
 Poan rafez d'ac'h ealik !

Er parkou , oc'h ar c'hleuziou ,  
 E leac'h ma'z euz bleunioù ,  
 Ma tigouez ganez gwelet  
 Eur wenanen gladet ,  
 Eur wenanennik dic'hloar  
 O klask mel dous ha koar ,  
 N'he laz ket , va mignonik ,  
 Poan rafez d'ac'h ealik !

Grad tomdor an anvou ,  
 O redek er measion ,  
 Ma tigouez ganez gwelet  
 Eur c'hrisk kaner coliet ,  
 O kana mil meuleudi  
 D'he Grouer gand dudi ,

encher 11

M'he spount ket, va mignonik,  
Poan rafez d'ac'h ealiek!

Ma pefe c'hoant eun dervez,  
Gand goall gompagnunez,  
Da ober eun dra c'hrevuz,  
Eraou fall, c'hoariou heuzuz,  
Eec'h prim, tec'h huit chep dale,  
Eruet ouz da ene!  
M'he laz ket, va mignonik,  
Poan rafez d'ac'h ealiek!

"Klaoda"

Le Prat Claude Marie

---